

Kinnig-labour

Karget a ziorren an Dudi Brezhoneg-Gallaoueg en UBAPAR



An UBAPAR zo ur rouedad kevredigezhioù e Breizh hag a gas war-raok ar buheziñ ha diorren an tiriadoù war ar maez. E penn ur rouedad 40 kevredigezh bennak emamp. Labourat a reomp war meur a dachenn : an deskadurezh d'an endro, an dudi brezhonek-gallaouek, an niverel hag ar meziantoù dieub, ar vugaleaj hag ar yaoankizoù.

Kemer a reoc'h perzh en ur skipailh 6 den gopret hag a vez o kenurzhiañ raktresoù, sevel oustilhoù pedagogel, stummadurioù, diorren lec'hel, ambroug kevredigezhioù. 8 merour a-youl-vat a zo o sikour ar skipailh.

Buhezet ho peus prantadoù e brezhoneg dija ? Kemeret ho peus perzh e kampoù vakañsoù e brezhoneg pe en un DABU dija ? Plijet e vefec'h o tapout skiant micherel en ur rouedad ? Kinnig a reomp deoc'h ur prantad-labour termenet evit erlec'hiañ ur c'hoñje mammelezh. Degemer mat en UBAPAR !

PETRA E VO HO KEFRIDIU ?

* Kenurzhiañ ar bodad Dudi Brezhoneg-Gallaoueg

Reiñ buhez d'ar bodad (emvodoù evit rouedad aozerien ar c'hampoù vakañsoù).
Kenurzhiañ, brudañ ha diorren hollad ar c'hampoù vakañsoù e brezhoneg hag e gallaoueg.
Kehentiñ war Breizh a-bezh.

* Kenurzhiañ an DABU-DARE

Kenurzhiañ deiziataer ar stajoù hag aozañ ar brudañ war Breizh a-bezh.
Kenurzhiañ deiziataer ar stajoù hag aozañ ar brudañ war Breizh a-bezh.
Skoazellañ ar skipailhoù stummerien.

* Kehentiñ

Aozañ ar c'houlzad-kehentiñ hag ar skignañ.

* Buhez kevredigezhel

Kemer perzh e skipailh gopridi an UBAPAR.
Kemer perzh e degouezhioù an UBAPAR (gouel 40 vloaz an Ubapar...).